



Kasour·ez

Kinnig labour embannet d'an / ar jeudi 12 mars 2026

Lec'h : **Plijidi (22)**

Doare post **CDD** H/F

Padelezh **3 miz**

23/03/2026 betek an 23/06/2026

Deskrivadur ar post-labour

Emañ Diwan o klask war-lerc'h ur c'h·g·asour·ez evit ar skolaj Diwan Bro Dreger e Plijidi.

Post CDD erlec'hiañ 29 e/sizhun - 2 nozvezh (14e50 d'al lun + 14e50 d'ar yaou)

Adalek ar 23/03 betek an 23/06/2026

O labourat dindan atebegzh penngasouriezh an ti-skol e vo fiziet ennoc'h :

Evezhiañ ar skolajidi,
Buheziñ ar skolaj (beilhadegoù, stalioù dizarbenn, surentez, yec'hed...),
Daremprediñ gant ar gerent diouzh an ezhommoù,
Kenlabourat gant ar skipailh renerezh, kelenn, melestradurezh.

Titouroù all :

CDD 29 e/sizhun :

Lun noz: 14e50

Yaou noz : 14e50

Lec'h labour : Plijidi

Gwarez yec'hed hag ur prevoyañs

Gopr eurioù kriz : 12,047 €

Ma 'z oc'h dedennet gant ar post, trugarez da gas hoc'h emstrivadur (CV + lizher en em ginnig) da tuta@diwan.bzh ha gant penngasouriezh.skolaj.plijidi@diwan.bzh e kopi.

Skiant-prenet ha barrezhioù goulennet

Doare den :

- Live B2 e brezhoneg degemeret mat. Brezhoneg komzet ha skrivet mat a-walc'h evit bevañ e brezhoneg pe/hag evit sikour ar skolajidi,
- Live Bak
- Bezañ en e aes evit daremprediñ gant ar grennarded
- Plijet gant al labour a-stroll

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://www.diwan.bzh/br/offres-emplois/animateur-trice-120320261205>